

394, suite)

Chanson

Var sujet eur Boulanger a vœ foeltet gant meri'het.

Var an ton gallec.

Clêvit eur chanson plesant
 Crêt da eur Boulanger coant,
 Pehini en devoa pariet
 C'hoec'h boezellod hed ouz plac'het.
 Driga, driga, driga,
 O tançal d'o discuiza, or loy loy la.

Oc'h eva re a win-guen,
 A voa savet en e benn,
 E teuas c'hoant deñ da vragal,
 Ma ped peder blac'h da zanzal.
 Driga, driga, driga,
 Prest e teuas da scuiza, or loy loy la.

(395) Pa vœ commencet da domma,
 En em vantas d'o scuiza,
 O tançal en e blijadur,
 Mes an danç a voa dreist-muzur.
 Driga, driga, driga,
 Ma rancjont e etrilla, or loy loy la.

Ar c'henta tro a eure,
 Ar Boulanger a c'hoerje;
 Commanç a rê da dialana,
 Hac enfin e teu da goea.
 Driga, driga, driga,
 Hac e rancjont e etrilla, or loy loy la.

Brial a rê ouz ar plac'het,
 Hœn a veze varc'hoas differet;
 Evidon pebes avantur!

Elec'h sonjal coout plijadur.
 Driga, driga, driga,
 Ha c'hoas va etrilla, or loy loy la.

Ar peder blac'h animet,
 En instant o deus tennet
 D'ar Boulanger e vragueren,
 Ha fouettet e zion fesqen.
 Driga, driga, driga,
 E vit e etrilla, or loy loy la.

(396) Pa en deus gïelet e fouetta,
 E commanç d'en em facha,
 Ma tizas unan ar plac'het,
 E c'hoeffou en deus difrequet.
 Driga, driga, driga,
 Sc'omp evit e etrilla, or loy loy la.

N'en em gave get ervat,
 E fesqennou leun a voad;
 Eur proces en deus intantet
 Da ober en instant d'ar plac'het.
 Driga, driga, driga,
 Ha testou interrojet, or loy loy la.

Ar goas a voa bet galvet,
 Ar Boulanger condamnet
 Da zisqierz pelec'h voa blesset,
 Pe da rêi an hed d'ar plac'het.
 Driga, driga, driga,
 E vit e etrilla, or loy loy la.

324

Quell eo ganen' coll va hed
 Erit gouzaon bea etruillet,
 Equet disqueuz va fespennou
 Leun a road hac a balastrou.
 Driga, driga, driga,
 Gante oc'h va etruilla, or lon lan la.

Boulangerien, me ho ped,
 Dionalit ouz ar plac'het,
 Rac na vec'h gante etruillet,
 Evel ma oun-me bet fouettét.
 Driga, driga, driga,
 Ha c'hoas e meus o faet, or lon lan la.

(397)

(Vol. VII, p. 394-397.)
 strophes non numerotées.